

KANTIK SANT POL AURELIEN.

—••—
 TON BELVEN

PE

PROPAGATION AN FEIS.

—••—

DISKAN KENTA.

1.

Savomp hor mouez, Kristenien,
 Da veuli an Dreindet,
 Ni oa hen devalijen
 Hag er fank ar pec'het;
 Doue hen deus digasset
 Deomp e Abostol,
 Meulomp an Dreindet santel,
 Trugarekaomp Sant Pol.

2.

Sant Pol a oa daoulinet
 E palez a Vro-Zos,
 Hendro dezhan astennet
 Mantel dential an noz,
 Pa oue souden strafuillet
 Dre eur bar sklerijen
 A mouez skiltrus meurbet
 Heun ael hen he gichenn

3.

Pol, emezhan, den Doue,
Sao buan ac'halen,
Dleour outh ouспен d'ar Roue
Eus ar gwir sklerijen ;
Ma c'hanavez ar vro-ma
Dreizouth an Dreindet sakr,
Satan a ren hen Eussa
Vel eun tyrant fallakr.

4.

Larkoc'h e'hoas var bord ar mor
Hag e kréis ar c'hoajou,
Dreist oll hen Occismor (hirio kastell)
Eo ruz e auteriou ;
Ruz gant ar goad innoçant
A vugale vian
Sacrifiet d'an tyrant
Var an toliou mean.

5.

Dont a ran abers Doue
Truezus ous an oll,
Da gass pelloc'h er vro-ze
E vir servicher Pol ;
An ad so dija skignet
Gant eur gouarneur mad,
An douar ze labouret
Puill e vo an eostad.

6.

Distag eta da galon
Eus palez Roue ar Zos,
Eul lestr ho vont da Leon
So duont ous da c'hortos.

Epad ma treuzi ar mor
Me vo ganeoc'h sturier,
Hag ho kasso da Arvor
Hen despet de reier.

7.

Sant Pol, sentus vel bepret
A glask e veleien.....
Var bord ar mor e tired
Ar bobl leun a anken;
Hen heur veled ho pellaad
Ho abostol karet,
An dour hen ho daoulagad,
An trez a zo glepiet.

8.

A piou a helfe kompren
Peger bras rann galon,
Pa zavas azioc'h ho fenn
E venediction;
Piou a helfe lavaret
Ar c'hri, ar c'heus dispar
Pa ne heljont ken guelel
Ar lestr divar an douar?

9.

Prest e c'herru en Eussa,
Prest e zeo diskaret
An toliou mean er vro-ma
Gant goad an den ruziet.
Bep pas d'ar zant so merket
Ennhi dre viraklou,
Plaç an dol-men distrujet
E saver ilizou.

10.

An dud eus an enezen
 A zired oll kontant
 Da walc'hi kalon ha penn
 Dre zour ar vadichant.
 Satan a iud kounnaret,
 A ra e oll ardou ;
 Mes nerz an dour benniget
 Her pil hen iferniou

11.

Cetu savet en Eussa
 Sklerijen gaër ar feiz ;
 Larkoc'h, abostol, brema,
 Terval eo c'hoas e Breiz.
 N'ho c'heus c'hoas labouret
 Nemet eun tam tachen,
 Guelit haont astennet
 Eur vro vras, eur blenen.

12.

Redit eta adarre,
 Redit a nerz askell,
 Redit varzu Plouneve
 Nijit varzu Kastell ;
 Ar brud eus ho santelez
 So eat beteg heno,
 Dija Burzudou nevez
 A rer dre ho c'hano.

13.

Hac hén dilezel Eussa
 Evit donet da Vas ;
 Arthur, Roue ar vro-ma,
 Hen receo laouen bras ;

A ro dezhan e balez
Ebars en enezen
Vit servichout da james
Dezhan, de veleien.

14.

Vel an ebestel genta
Goude maro Jesus
A deuas da lodenna
Ar bed oll truezus;
Pol a ro da bep hini
Eus e oll beleien,
Vit hen tailla a kreski,
E lod er vinien.

EIL DISKAN BETEG AR FIN.

15.

Sant Pol, kenta devesiour
E guinien Leon,
Beillit mad var ho labour,
Diouallit hor c'halon;
Dalc'hit ar religion
Ato en hon touez,
Grit ma reimp hor mission
Oll gant kals a frouez.

16.

A neuze bennos Doue
A goezas var ar vro;
Satan a ioa Roue,
Mont a reas en he dro.
Assamblez gant ar serpent,
Horrol an Enezen,
C'henem strinkas an tyrant
Bars er mor var e benn.

17.

A neuze ne glevet ken,
Kriaden estlamus
Eur vam ho krial e anken
En dro d'an dol-men ruz.
An ecleo ne respont mui
En noz bars er c'hoajou,
nemet d'ar vouez ho veuli
Ebars en Ilizou.

18.

Ar vugale d'asprenet
Dre zour ar vadichant,
Ne zantint ken ho redet
Ho goad ken innoçant.
Jesus hor gwir Redemptor
Evitho sacrifis,
A zo e gostez digor
Var auter an Ilis.

19.

A neuze kroas hor Zalver
Savet huel hen er,
A bellaas vit pell amzer
Diouzomp Lucifer;
Daoust a dont a raffe c'hoas
Da ren var Breiz-Izel?
Nan, n'hi vo fidel d'ar groas ;
Biken, kentoc'h mervel.

20.

Da heur diveza, Breiz,
Neket c'hoas sonet ;
Keit a ma talc'hi d'ar feis,
Ne vo danjer ebet ;

Mez gant gwir e lavarfen
E simplaa da vuez ;
Ar c'hlenved a zo er penn ;
Hen treid lakomp evez.

21.

Lakomp evez na dâfle
Ive beteg ar c'hreis,
E c'halfet sôn a neuze
Ar glaz evidoth, Breiz.
Pa vo taget ar galon.
Renk Izel hag huel
E vi maro, va bro Leon,
Kouls hag oll Breiz Izel.

22.

Nan, ken pell hag ar reier
Var bord aotchou Leon,
E vevo, nerzus, tener
Ar feiz hen hor c'halon ;
A pa deuot hor Zalver,
Da varn e fin ar bed,
E kavot hen hor c'hartier
Ar frouez ho c'heus adet.

23.

A pa gollo an heol
E sklerder, e c'hened
E paro c'hoas er vro-oll
Eur sklerder gaer meurbet ;
Sklerijen eur stereden
Ne gollo e hini,
Ken a vo eur gurunen
Var hor penn ho sintri.

Sant Pol kenta devesiour, etc.

24.

Kendale'hit var an hent mad
 An dud e gras Doue,
 Digorit ho daoulagad
 D'ar re a dreus-vale;
 Diframmit ho ene paour
 Eus ivinou satan;
 Ar ploum-ze a deuio aour
 Dre ho nerz, spered glan.

25.

Dalchit an oll arvoris
 Var hent ar barados,
 N'hi vo vidoc'h eur c'houris
 Da zeis ar repos;
 Eur c'houris a eneou
 Gouneet gant ho c'hoezen,
 Eur c'hele'h kaër hen envou
 Da lakaad var ho penn.

Jacques - M^{ie} Guillou,
~~lecteur de~~ *St. Laurent*
 q^d il composa ce Cantique
 il était maître d'école
 à St. Col.

J.-M. G.

*Seiz-ha breiz a plous
 p'cos signez de ce initial
 v.g. 1878 - p. 24...*

Imprimatur.

Corisopiti die 21 Aug. 1875.

† D. ANSELMUS,

O. S. B.

Ep. Corisopiti et Leonensis.